



E Lokorn, war stern e réd, e réd, ar vulzun bepréd.

PHOTO JOS LE DOARE.

Bleun-Brug

Niv. 81 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

MAE 1955

Kanaouenn ar Gwiader

TON : 30 Chansons bretonnes, p. 25.

1. Ar gwiader, abred war-sao, bep mintin,
A grog gant e labour n'eur gana lirin.
Mall eo kregi ! Kloc'h an deiz a son sklintin.
Ha tipadapa, ha tipadapa !
Neudenn dorret, amzer gollet !
Buan en-dro, buan eta !
Iroulañla.
War ar stern e réd, e réd
Ar vulzun bepréd.
2. Gwea 'ra bemdez, voulouz, gloan ha lien,
Da wiska paizanted, koulz ha bourc'hizien,
An itronezed vras hag ar mitizien.
Ha tipadapa, ha tipadapa !
Hir eo an deiz ha berr an noz,
Ha poania 'ra 'r gwiader koz.
Iroulañla !
War ar stern, e réd, e réd
Ar vulzun bepréd.
3. Ar gwiader, en despét d'e wall-chañsou,
A c'hortoz gant fizians frouez e boaniou :
An heol benniget a skarz ar goañvou.
Ha tipadapa, ha tipadapa !
Dalc'hmat, laouen, e labour ;
Er Baradoz e tiskuizo.
Iroulañla !
War ar stern, e red, e red
Ar vulzun bepréd.

(Troet diwar 30 chansons bretonnes Kerlann-Ar Falz
gant V. S.)

TAOLENN

Deuit Spered Santel : L. B., paj. 1. — Gwir Vreizad : C. C., p. 2. — Hon Tad
Santel ar Pab hag ar Vretoned : p. 3. — Ar Breur Constantius : L. Lok, p. 5. —
Breiz e Rom : F. A., p. 8. — Broiou ar Sav-Heol-Tosta : Y. G., p. 10. — Kilhog an
ti all : Melar, p. 11. — Buhez ar B.-B. : p. 12. — Keleier : p. 15. — B.-B. Landi :
p. 16. — Hardiz paotred : p. 17.

TAOLIT EVEZ MAT

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1955 ?

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1540.90 Nantes.

Kas ar skridou da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

133693

Deuit, Spered Santel, Deuit !

Aet eo buan rodig an amzer en-dro !

Setu ni e miz Mezeven, miz an deiziou en o hirra, miz an deiziou
tomm, miz an ed o tihodi hag ar frouez kenta o tarevi.

Torret eo krizder an avel. An heol, paket gantañ e holl splannder,
a skuilh bremañ, a bep tu, ar vuhez hag al laouenidigez...

Hanter kant dervez a zo tremenet abaoe Pask. Distroet eo adarre
gouel bras ar Pantekost, gouel ar Spered Santel, heol burzudus an eneou
kristen.

Ar pezh ma ra an heol, roue skedus an oabl glas, evit trevajoù an
douar, ar Spered Santel her gra ive evit kalon ha spered mab-den.

Doue a zo laouen. Hen eo Tad ar sklerijenn, eienenn pep laoueni-
digez. Pa zigas e Spered d'an ebestel, bodet er Gambr-Lid, da zeiz ar
Pantekost, ar re-mañ a zo karget eus eul laouenidigez ker bras, ma ne
c'hell mui netra hel lamet diganto, na gourdrouzau, na trubuilhou,
nag ar maro zoken...

Ar Spered Santel a zo deuet evit chom atao gant an Iliz. Deuet eo
evit an ebestel genta, deuet evit ar re o deus digemeret o c'helennadu-
rez, evidomp holl hag a zo kristenien.

Roet eo bet d'eomp evit beza hor frealzer dispar, mignon dous hon
ene, levenez hor c'halon. A belec'h ta e teu neuze ma vezomp ken alies
enkrezet ha diskaret gant an disterra trubuilh ? Hep mar ebet, dre ma
n'hon eus ket a-walc'h a feiz hag a fiziañs ennañ, dre ma lezomp traou
ar bed da gemeret re a blas ennomp.

Ne c'heller ket servicha daou Vestr !

O klask plijout re d'an dud, ha d'eomp hon unan, e chadenomp ar
Spered Santel hag e viomp outañ da labourat ennomp hag evelse kaer
hor beus ober e chomomp trist, e chomomp dall ha dinerz ha gwan.
Gwasoc'h, koll a reomp hor poan ! An dén, pa n'emañ ouz e sturia, er
vuhez, nemet e skiant hag e sklerijenn e-unan n'ez a ket da bell, hep
kiztezia, en tu pe du.

« Pa ziskenno warnoc'h ar Spered a zigas d'eoc'h, a-berz va Zad,
hennez, eme Hor Salver d'e ebestel, ho kaso dre hent ar wirionez hag
o tiwallo diouz pep fazi. »

Komzou kaer hag a zo lavaret evidomp-ni ive. Hep skoazell ar Spe-
red Santel, n'ez eus netra en dén, netra santel.

Unan eus ar Vretoned a zeblant beza, ar gwella, anavezet ar wirio-
nez-se, eo CALLOC'H. E skridou a zo leun eus ar pedennou birvidik-se,
tarzet eus eur galon digor da labour ar Spered Santel, hen hag a lavare :

« O ya, chomit ganeomp. Hep doc'h ni n'omp netra
Hep doc'h eur bobl a varv 'vel eur c'horf hep bara... »

« Ni ho ped hon tal war an douar
Ouz hor c'hlemmou ne viot ket bouzar
Pa z'omp skuiz el labour, darnijit d'hon harpa
Roit d'eomp nerz e kreiz hon anken
Diwallit Breiz da virviken. »



Muioc'h mui eo start ar vuhez evit pep hini. Tenn hag hir eo ar brezel !

Da stourm a zo war bep tachenn. War dachenn Feiz ha Breiz hag ar Bleun Brug, koulz ha war dachenn ar vuhez pemdeziek, hor beus ezomm, evel an ebestel gwechall, sklerijenn, nerz ha frealzidigez.

Douget omp d'ar fazi, taer da fallgaloni. Piou hon dalc'ho war an hent eün, piou a laouenaio d'eomp hor c'halon ? Piou a ziluio ar c'hudennou ne weler mui na skoulm na diskoulm enno ? Piou, va Doue ! N'eo ket an dud eo ! Piou ta ? Ar Spered Santel heol burzudus an eneo. Hen eo a zo mat ha kreñv, Hen eo a oar ar penn kenta hag ar penn diweza a bep tra. Hen eo ar mignon didrouz hor c'huzulio, hor reno ar gwella.

O Spered Santel, Spered glan, deuit ha pellañ diouzomp an droug, deuit d'hor staga ouz ar mad. Diwallit hon ene ha kemerit hen, evel ma kemer ar vamm he bugelig d'e starda war he c'halon gant teneridigez. Deuit... Deuit...

L. B.



GWIR VREIZAD

Breizad oun-me ganet
Breizad ez oun chomet
Ha keit ha ma vevin
Gwir Vreizad e vezin.

Siouaz, kement a dud
Daoust ma 'z eo mat o brud.
Den ne oar a belec'h
'Zo deut dezo diou vrec'h.

Forz piou... eun divroad
— Gant e baperiou mat
'Vo gall — hep kar na Tad —
Biken ne vo Breizad !

Rag evit her beza
E vank dezañ eun dra :
Kaout e Breiz e wriziou
'Lec'h ma soñ ar biniou...

Breiz riblet gant douriou
Hag a lusk ar Moriou
Ennout gwriziet dalc'hmat
'Chom kalon ar Breizad !

C. C. Mab Janig-Rénea Montroulez.

En envor an Aotrou Y.-V. Perrot, diazeour ar Bleun-Brug.

Hon Tad Santel ar Pab

pa gomz ouz ar Vretoned, a rankfe beza selaouet ganto !

En e Gemennadurez da geñver Gouel Nedeleg, hon Tad Santel ar Pab Pi XII^{vet} en deus embannet gwirioneziou talvoudus-kenañ d'ar Vretoned ha da gement bro vihan a zo dre ar bed.

E gomzou a zo gouiziek-meurbet, met c'hoant am eus da denna ar vouedenn anezo, evit he c'hinnig d'eoc'h-c'houi, lennerien vat.

Komz a ra ar Pab diwar-benn ar « vuhez vroadel ». Petra 'zo dindan ar geriou-se ? Hen lavarout a ra e-unan. Ar « vuhez vroadel » a zo graet gant ar pezh a gaver e buhez eur vro pe eur bobl, hag a ra d'ar vro-se, d'ar bobl-se, beva, e-kreiz an unvaniez, en eun doare disheñvel diouz ar broiou all.

Pep bro, pa vez « sivilizet », he deus c'hoant da veva en he giz, hervez he spered hec'h-unan. Hag ar pezh a verk ar muia he deus eur **spered** disheñvel diouz ar poblou all eo ar **yez** disheñvel a gomz. Ar brezoneg a gomzomp a verk hon eus eur **spered breizat**, disheñvel diouz spered ar broiou all.

Daoust ha fall eo ar c'hoant-se da veza disheñvel diouz ar broiou all ? da gaout eur « vuhez vroadel » ? Pell ac'hano, peogwir eo eun dra vat hag eun dever ! Ar Pab hen lavar fraez a-walc'h : « **Ar vuhez vroadel, emezañ, gwir ha gloar eur bobl, a c'hell hag a dle beza laket da greski** ».

Setu perak e c'hellomp, ni Bretoned, hag e tleomp, lakaat da veva ha da greski ar brezoneg hag an traou breizek en hon touez.

Daoust hag en eur ober an dra-se e rafemp politikerezh ? Hon Tad Santel ar Pab a gemer ar boan da respont d'eomp war ar poent-se ive :

« **Ar vuhez vroadel, hervez ar pezh ma 'z eo, a zo eun dra er-maez eus ar politikerezh. Ken gwir eo kement-se, ma c'hell ar vuhez vroadel kreski kichen-ha-kichen gant re all e diabarzh ar memes stad (da lavarout eo dindan ar memes Gouarnamant).** »

Hervez ar c'homzou-se, diou vro a c'hell senti ouz ar memes Gouarnamant, hep kaout ezomm da veva o-diou er memes doare. Setu perak ni, ma fell d'eomp beva en eun doare disheñvel diouz ar Fransizien, n'eus netra da damall d'eomp, ne reomp droug na d'ar Gouarnamant na da zen ebet.

Ar c'hontrol eo : ar Gouarnamant en deus an **dever** da sikour ac'hanomp da veva en doare ma plij ganeomp **e-keñver traou ar spered hag ar relijion**. Sklaer eo adarre, war ar poent-se, komzou Pi XII^{vet} :

« **Sur eo e vije faoz an doare d'en em gemer evit unvani eur stad, eun taol trubarderezh e c'hell beza zoken, ma vije lezet a-gostez gwirioù hag ezommou ar broiou bihan.** »

Setu eta dever ar Gouarnamant : sikour ar broiou bihan a zo dindan e c'halloud da virout ha da greski en o c'hreiz eur vuhez vroadel.

Evit ar pezh a sell ouzomp-ni : sikour ac'hanomp d'ober implij eus hor brezoneg, evit dont da veza « sivilizetoc'h » en hor giz.

Abaoe ar brezel diweza, hor Gouarnamant en deus klevet alies a-walc'h e begement gant ar Vretoned, — gant Kuzul-meur ar Finistère, n'eus ket pell — ha klevout a raio c'hoaz !!

Met bez' ez eus Bretoned, Katoliked war o meno, tud a skiant hag a ouiziegezh war o meno, hag a ra pep tra evit lakaat hor Breiz da goll he buhez vroadel.

Ra blijo gant Doue e selaoufent ar gentel, — n'eo ket an hini genta — a rô d'ezo hon Tad Santel ar Pab !

Ra vezint leal gant mouez o c'houstiañs !

Ra boagnint da anaout gwelloc'h ar pezh a ra buhez o bro c'henidik !

Ra vezint brokus da harpa ar re a labour gant furnez da greski hor buhez vroadel !

Ha m'en deus an Aotrou Doue roet d'ezo eun anaoudegezh dispar eus ar galleg, ra soñjint na vezint ket tud a-zoare, keit ha na c'hellint ket leda war baper, **e brezoneg**, ar menozioù a zisplegont ken brao e galleg !

Rak ar Breizad n'eo ket gouest d'ober implij eus ar brezoneg, da nebeuta en eur skriva, n'eo ket Breizad a-walc'h.

Ra soñjint er gont o do da renta da Zoue war ar poent-se, mar dint karget, e doare pe zoare, da ren ar Vretoned war heñchou ar vuhez mañ pe war hent ar vuhez beurbadus !

Evit ma vezo Breiz din eus he renk e-touez ar broioù bihan, e-keñver traou ar spered, ne vank nemet **eun dra hepken** : ma raio ar **Katoliked**, — ar re zesketa da genta — o dever penn-da-benn hag hep damanti.

Setu aze evidomp eur **c'hras a dalvoudegezh divent** da c'houlenn d'ezo digant Doue, dre zaouarn an Itron Varia hag hon **holl** Sent, — ar re nevez koulz hag ar re goz !

Arzel Gervorvan.



Klevit 'ta !

Ha rakprenet hoc'h eus :

Buhez an Ao. Perrot, gant an Ao. Poisson.

Emañ al levr dindan ar wask.

Skriva da : Abbé Poisson, 22, rue Saint-Louis, Rennes.

Kasit hoc'h ano, hep arc'hant.

PRENIT : E skeud Tour bras St Jermen,
gant Yeun ar Gow.

750 lur war baper ordinal. — 1000 lur war baper kaer.

C.C.P. Yves Le Goff, Gouezec, Fini., 12.668 Rennes.

Histoire de Bretagne (eil mouladur).

Abbé Poisson, 22, rue St-Louis, Rennes — 750 lur.

Va zammig buhez, gant J. Priel.

595 lur — Bodenan, 3, rue des Potiers, Ergué-Armel, Fin.

Endro da Vleun-Brug Landivizio

Ar Breur Constantius

(Eun astenn da « Bleun-Brug » miz C'houevrer)

Eun tamm istor a zo ret da ziskouez talvoudegezh oberou ar Breur Constantius.

Abaoue maro ar Gonidec tabut a veze, heb ehan, diwarbenn an doare skriva. Ne veze ket, avat, kalz soursiet da lakât kentelia brezoneg er skolioù d'ar mare ma veze digoret bemdez skolioù nevez. Danjer a yoa e teufe ar vugale da goll yez ha ouenn ouspenn ma veze, er skolioù, taolet dimeganñ warni. Ret ! oa digori daoulagad ar Vretoned, mistri ha kerent — *Fanch Vallée, Emile Ernault*, an aotrou *Buléon* rejant e Santez Anna Wened, en em lakeas d'hen ober gant pennadoù meulet war ar c'hazetennou « *La Croix des Côtes-du-Nord* », « *L'Indépendance Bretonne* », « *La Semaine Religieuse de Saint-Brieuc* », « *Le Nouvelliste Breton* ». Skriva ' reent : « *La langue bretonne est en ce moment très sérieusement menacée par les écoles dans son existence même. L'école ne tue pas seulement notre langue et notre pensée nationale ; elle porte un coup terrible à notre vie morale. Le plus grand danger vient de nos écoles chrétiennes. Il est urgent de prendre des mesures efficaces pour assurer sa préservation* ».

Ar pennadoù-ze a oa bet savet e 1894 ha 1895.

Edoug Kendalc'h, an Association Bretonne e Sant-Brieg, e Mezeven 1896, divizet e voe war an doareoù da viret ouz digasted hag enebiezh zoken mistri ha mestrezed ar skolioù kristen e keñver ar brezonek. Daou ugent ezel eus an A.B. a c'houlennas e vije difennet rei ar simbol er skolioù, e vije desket o c'hreñsioù, e brezoneg hebken, d'ar vugale diwar ar meaz, e vije implijet ar brezoneg evit deski ar galleg e pep skol. Tri eskob, senatourien, députeed hag all a zinas ar goulenn. Etouez an dud-ze ne oa breur ebet eus Urs Frered de la Salle (« les Frères à quatre bras » a veze grêt anezo). Sinet e oa gant ar Br. Cyprien, rener meur, Yrieux Marie, Anatolien, Abel, Stéphane ha Lucien eus Urz Frered Lamennais.

Savet e voe kerkent « *Comité pour la préservation et la propagation du celtique armoricain* ». Fanch Vallée a voe laketa da sekretour.

E pe stad edo neuze ar brezoneg er skolioù ?

Fall kenañ e bro Dreger. Mat awalc'h e bro Wened. Diwar kuzulioù an aotr. *Buléon* eun dore-skriva a oa bet renket. **Neb ne zentfe ket outañ a vije nac'het rei d'ezan an Imprimatur**. Eur « *Manuel breton-français* » a voe laketa war ar stern. **Urz e voe roet, aberz an aotr 'n Eskob**, da ober ar c'hatekiz hag an **Istor zantel e brezoneg**.

Skolioù a yoa e Eskopti Kemper ha Leon e veze great enno gant ar brezoneg : e *Plougastel* e skol seurezed Sant Thomas, e skolioù Frered Lamennais *Kastellin* ha Berlez elec'h e veze kenteliet ar vugale war al labour-douar. Skoazellet m'edont gant ar Breur Lucien († 1897) hag ar Breur Bernard, ensellour, o daou desket bras war ar brezoneg.

— E *Landivizio*, ar Breur Constantius, eus a Urz de la Salle, a rae, abaoe pell amzer, gant ar brezoneg da zeski galleg d'e skolidi hervez doare ar Breur Savinien, skolaer en Arles, bro Provançs. Hemañ a oa anavezet e peb korn Bro-C'hall o veza m'en doa displeget dirak pennou bras Skol Veur ar Sorbone eun doare da lakat ar vugale da zeski mat ar galleg oc'h implija ar yez a ouezont p'en em gavont er skol : « *De l'utilisation des idiomes et dialectes locaux pour mieux apprendre le français* ».

Evit gwir, diouer a levrioù skol a yoa. Levrioù an Tad Maner hag an Tad Gregor a Rostren a oa koz ha dizurz ennañ. Yezadur ar Gonidec ' oa an hini

gwella evit ar vistri. Evit ar vugale e kaved « *Rudiment du Finistère* » grêt gant Le Jeune, bet mestr-skol e Plabennec, tost da gant vloaz a yoa, Manuels an aotr. Perrot hag hini Toullec, skolaer lik en Huelgoat.

Divizet e voe gant ar C'homite de Préservation goulenn skoazell ar C'honorat Bourgeois hag an aotr. Hingant, beleg, da lakat e brezoneg ar « *Manuel d'Agriculture des Frères de Ploërmel* ». Ar Frered e brometas e voula. Ne voe moulet nemet kalz diwezatoc'h (1903-1904) ebarz *La Résistance de Morlaix*, ha ne gredan ket e voe gret eul leor gant ar mouladur-ze daoust ma voe embannet, e 1925, gant moulerez Prud'homme edo da veza gwerzet dizale : « *Al labour douar kenteliel er skolioù bihan diwar kentelioù brudet ar breur Abel* ».

Ouspenn al levr-ze ar C'homite a zoñjas advoula leorigou ar Breur Polycarp, hini ar chaloni Alexandre, moula leorigou evit ar skolioù ha sevel bep bloaz kentstrivadegou evit ar vugale. Eur brezegenn, bet moulet nebeut goude beza bet displeget gant an aotr Buléon « *Le breton et les écoles* » (1895) a reas kalz berz e Breiz-Izel. Diwar-se Breur Visiteur Kemper (La Salle) hag ar Breur Lucien (La Mennais) a zavas roll ar c'hentelioù en o skolioù. Ne reent, avat, nemet heuilha kuzulioù an aotr. La Mennais. Skrivet en doa heman, e 1837, da vinistr an deskadurez : e oa ret kaout skolaerien brezonegerien evit skolioù Breiz-Izel.

E Kendalc'h, an « Association Bretonne », e 1897, gourc'hemennou a voe great ha Frered Kastellin ha Pleyben evit al labour vat gret ganto war dachenn al labour douar hag ar brezoneg.

Harp a zigouezas gant ar C'homite aberz eur breizad brudet, Joseph Loth, dean skol-veur Roazon. « *Ma fell deomp emezañ en e brezegenn, miret ar brezoneg eo ret e lakat deski er skolioù*. E skolioù ar c'houarnamant ? Na fiziomp ket war-se. Er kolioù libr eta ».

Daoust ma ' oa bet renket diwezat kenstrivadeg ar skolioù, 13 skol baotred er Finister ha 3 er C.-du-N. — 11 skol merc'hed er Finister ha 2 er C.-du-N. a gemeras perz. Ar maout a yeas gant Landivizio ha Plougastel (1898).

Met setu ar gelaouenn « *L'Instruction publique* » (4 Sept. 1898) da skei war ar skolioù ha gwasoc'h war ar relijion. Respont a reas an aotr. Buleon : « *Il ne s'agit ni de politique, ni de religion mais de pédagogie* ». Pañefe-ze ne vije ket bet roet digor gant kazetennou a bep liou politik a Vro-Wened da roll hor c'hentrivadegou. Danvez ar c'hentrivadegou a ' oa bet : an teil, ar c'houez, an alar, ar c'hrapouez. Skeudennet oa lod eus an deverioù.

Bloaz goude an danvez ' oa : konta eun istor bennak. Da holl skolioù ar Finister e voe kaset roll ar genstrivadeg. Dont a reas d'ar renerien 350 dever eus ar skolioù, 102 eus a dud diskoliet. Unan eus ar prizioù a yeas gant an « *Instituteur public de Saint-Pabu, Finistère* ». Skol Frered Kastellin a gemeras skouer war hini Landivizio, hag evit ar prizioù e voe c'hoariet eur pezh brezonek.

Fouge a voe gant ar vrezonegerien. Goulem a rejont ma vije laket etre daouarn ar skolaerien doare Kentelia ar Breur Constantius : « *Ces résultats sont dus à l'emploi judicieux de la méthode d'enseignement du français par le breton que le Frère Constantius emploie depuis plus de 25 ans et qui lui a valu les plus fortes récompenses à diverses expositions* ».

Kentelioù ar Breur Constantius a oa eur mellad labour. Hir e oa ha mizus e vije bet e voula penn da benn. Hag ive Vallée hag Ernault a oa krog gant gwellât en doare-skriva. Petra rajont ? Diverra labour Konstantius, e gemenn eun tamm ha warlerc'h e voula ebarz Bulletin Archéologique de l'A. B. (1898), ober eul leor diwar goust ar mouladur : « *Abrégé de la Méthode de Landivizio pour apprendre le français par le breton. Saint-Brieuc, Imprimerie-librairie-lithographie René Prud'homme. 1899. 0,16x0,26. 140 p.* E dibenn al leor ez eus eun « *Terminologie* » da lavaret eo gerioù nevez savet gant Vallée hag Ernault, kalz anezo avât, emezo, gont sikour ar Breur Constantius, evel : *kent-gér* : préfixe, *dilost* : terminaison, *hano kadarn*, *araogenn*, h. a...

E 1899, e voe moulet war Bulletin an A.B. 50 pajenn kentelioù labour-douar. Diwar lenn B.B. miz C'houevrer e c'helfed kredi n'en deus ar Breur Constantius, aozet nemet eul leor — p'en deus aozet daou. Da genta : *Kentelioù brezonek da drei e gallek* — « *Enseignement du Français par le breton. Cours élémentaire. Livre de l'élève par le Frère Constantius des Ecoles Chrétiennes. Quimper. Imprimerie Arsène de Kerangal. 1899. In 8°, 206 pp.* »

Eur raskrid brezonek a zo e penn kenta al leor, hag eul « *lexique* » en diwez. E 1900, e voe meulet : *Kentelioù brezonek troet e galleg*. « *Enseignement du français par le breton. Cours élémentaire. Partie du Maître par le Frères Constantius des Ecoles Chrétiennes. Vannes. Imprimerie V^o Lafolys et fils. In 8°, 200 pp.* Doare eur mellad levr a zo gant hemañ o veza ma ' z eo teo ar paper ha brasoc'h ar follennou.

E galleg, ar Breur C. a lavar ez eo e zoare kentelia heñvel ouz hini e genvreur Savinien.

D'ar memez mare e lenned e Keleier an A.B. : « *Les Frères de Lamennais annoncent la publication d'un ouvrage du même genre. Le R. F. Abel a constitué dans ce but une commission spéciale sous la présidence du C. F. Directeur de Landrévarzec dont la compétence bien connue est une garantie de succès* ». Al labour-ze a zo e ano : « *Les cahiers bretons français du Frère Théodule* » evit skolioù Bro-Wened.

Eul labour all, tavoudus, a voe kaset gant ar Breur Théodule, da sekretour an A.B., roll plantennou Breiz e latin, gallek, brezonek. *E pelec'h emañ ?*

Ouspenn kentelia e brezoneg ar Breur Constantius a lakee e skolidi da gana sonioù ha da zibuna pezioù-c'hoari. Anaout a reomp daou bezig bet savet gantañ : *An teir c'had hag ar mevel laer*. An dud n'o deus ket gwelet al leorig a 40 pajenn, in 12, a zo ennañ an daou bezig-ze, a gav dezo n'ez eus nemet unan. War ar golo eo moulet kement-mañ : « *Diwar skridoù ar Breur Constantius. An teir c'had hag ar mevel laer — daou bez c'hoari farsuz, dastumet, asgwelet ha reizet a nevez gant kloada ar Prat-Pluenzür — Sant Brieg, Ti-moullerez Sant Guilherm, 27, Bali Charuer.* »

Ha ne gav ket deoc'h, lennerien, e vije dereat enori ar Breur Constantius o lakât displega an daou bezig-c'hoari-ze e Bleun-Brug Landi ? O danvez, avât, a zo reuzeudik. Hanter kant vloaz bennak a zo em oa laket Paotred Berlez d'o c'hoari e Lokournan. Da gloza « *Ar Mevel laer* » ez eus meneg eus eur werzerez frouez.

Potred Berlez a jeñchas ano hini ar pezh-c'hoari hag a echuas an abadenn evelhen : « *Eur gwenegad prun a gafot d'abrena e ti Anet Koantik (eul lesano), e plas ar marc'h e Lokournan* » ar pezh a lakeas an holl, Anet he unan, da c'hoarzin.

— Ne ' z eus bloavez moulerez ebet war al leorig. Moulet eo bet e 1908.

Pa varvas ar Breur Constantius setu petra ' skrivas an A.B. : « *La Bretagne a perdu cette année (1906) l'un des plus fidèles défenseurs de sa langue... Si les circonstances avaient été favorables on peut dire que le mouvement déterminé par le Frère Constantius assurait l'avenir du breton et de la Bretagne ; l'école cessait d'être un instrument barbare. Sa Méthode est celle de l'avenir et du Progrès* ». Kloadae ' r Prat, diskibl Breur Constantius, ha deut da veza kelenner e Landivizio a lavaras kenavo dezañ e kroaz ar Vretoned (28-1-1906).

Gant rann-galon, Kloada a lavar : « *Eun daou pe dri bloaz goude ginivelez al leor « Kentelioù » e oe red, zoken e Landivizio, lezel anezañ a gostez. Ha perak kement-se ? Abalamour d'ar gerent ha d'ar vistri. Ha koulskoude, emezan, abaoe m'emaoun ama ar brezoneg a zo adarre karet, enoret ha kanet.* »

Kloada a lavar pegement doun oa karantez Breiz e kalon ar Breur Constantius ha pegement a vad en deus great da vugale skol Landi epad an naontek vloaz m'eo bet o ren ar skol gristen-se.

D'ar 6 a viz Here, « *Kroaz ar Vretoned* » a voule eur barzoneg savet gant ar Breur Constantius : « *Meuleudi Bro-Leon* ».

L. Lok.

BREIZ E ROM

Kreizenn ar bed katolik, Rom, a zegas war-du enni ar birc'hirined eus pep korn an douar. An eskibien a zeu di bep an amzer war « dreuziou Sant Per ». Ar gannadourien en em heuilh eno dibaouez. Studierien a bep yez a zarempred he skoliou-meur evit rei al liou roman d'o deskadurez beleg.

Ac'hano eun niver bras a diez, er Gêr eternal, evit boda tud pep bro : ilizou, kloerdioù, skolaioù, ha, gwechall, tiez-herberc'h hag ospitalioù.

Ar C'hardinal a *Goettivy* eo a grouas evit Breiz eur savadur a seurt-se e Rom. E 1455 (500 vloaz 'zo bet d'an 20 a viz Ebrel) e voe karget eur beleg da soursial ouz ezommou-ene hor c'henvroiz hag a oa neuze, evit an darn vuia, studierien pe birc'hirined o tremen. Eun iliz koz pourchaset dezo a voe anvet, evel ma oa dleet, *Sant Erwan ar Vretoned*.

E 1582, *Kenveuriez Sant Erwan*, gant he holl vadou, a voe kemmesket gant Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued, met eur barrez a voe anezi betek 1824. An iliz, bet savet en trizekvet kantved, a voe diskaret e 1875, ha lakaet en he lec'h eur savadur bihanoc'h a voe implijet ennañ kolonennou ar santual kenta, ha neuze eun nebeut traoù kaer ha skrivadurioù beziou.

An iliz nevez, stag ouz eun ti, a sko war eur ru vihan darempredet gant nebeut a dud, h arak-se an darn vrasa eus ar birc'hirined ne daolont ket evez d'ar c'heer ez eus teir volz gwareget ; an hini greiz, kinklet gant kolonennou-brao, eur wareg warni o tougen war e greiz skeudenn ar Werc'hez gant *Sant Erwan* ha Sant Fransez a Siz.

An diabarz, koant kenañ, a zegas da soñj eus ar XV^{vet} kantved. En adreñv d'ar c'heer ez eus teir voez gwareget ; an hini greiz, kinklet gant kolonennou-gou mist, a zo enni eun delwenn arc'hant gant *relegou eus ar Sant breizat*.

Ouz ar volz eun daolenn gaer, livet gant *Seitz*, a ziskouez ar C'hrist, en-dro dezañ *Sant Erwan*, Sant Varzin ha Santez Klotilda a gleiz, Sant Loeiz, Sant Benead ha Santez Jenovefa a zehou. — E iliz Sant Kom ha Damian, e kaver ivez eun daolenn livet eus *Sant Erwan*.

An iliz a zo e karg eur chapalan gall, d'ar mare-mañ an Aotrou Fournier, advokad e lez ar « Rote ». An oferenn a vez lavaret enni, da nebeuta, bep sul ha bep gouel-berz. Lavaromp ouspenn e weler, d'an 19 a viz Mae, Bretoned Rom o tont di evit pardon o c'henvroad, hag o diwallour brudet.

Meur a oferenn-blaen a vez araok an oferenn-bred. Eno en-dro da gannad Bro-C'hall e vez gwelet beleien, Frered ha Seurezed, holl pe dost ginidik a Vreiz.

Kavout a reer Bretoned e-touez an Tadou Gwenn, an Tadou a Vontfort, an Eudisted, an Asomsionisted, an Oblated, Frered Sant Yann a Zoue ha Frered Ploermel, Seurezed ar Retred, Seurezed Sant Tomaz a Gêrnevez, Chaloniaezed Sant Aogustin, h. a.

D'ar pardaez e vez bennoz ar Sakramant, ha war-lerc'h ne vanker ket da gana, evel e Bro-Arvor, kantik hon tadou « *Nann, n'eus ket e Breiz* ».

Lavaromp amañ ez eo *gouestlet ivez da Sant Erwan chapel ar Furnez*, bet skol-veur gwechall, hag ez eus eur vreuriezh advokaded dindan e baeroniezh e Santa Lucia della Tinta, hag eur chapel dindan ar memes ano e Santa Maria in Campitelli. Erfin, nevezikoc'h (1931), Frered Ploermel o deus lakaet dindan gwarez patron Breiz o c'henta ti en Itali, an *Istituto Sant 'Ivo*, hag a ro bod war eun dro d'o c'hannad dirak ar Pab, d'eur skolid, ha d'ar Frered a vez o heulia kentelioù ar Skol-Veur Gregoriat.

E-kerz ar c'hantvedou tremenet, e kavomp meur a zen brudet o deus lezet roudou eus an amzer o deus tremenet er Gêr-Veur. Anvomp da genta-holl *Alan a Goettivy*, eskob Kemper, deuet goude da veza arc'heskob Avignon ha kardinal.

A-drugarez dezañ eo e roas Nikolaz V eun iliz broadel d'ar Vretoned o chom e Rom. Eur monumant kaer a zo bet savet dezañ e bazilik Santez Praksed.

Gwelout a reer c'hoaz, amañ hag ahont, skridou-bez o tigas da soñj eus Bretoned brudet : *Jakez a Bencoedic* (1462) ha *Yann ar C'hlerc* (1513), « Selaouerien » er « Rote » ; *Alan a Guirihet* (1471), ha *Per a Bloveret*, eskob Aleth (1603). Pa voe unanet iliz Sant Erwan gant hini Sant Loeiz (1583), *pemp beleg breizat* a sinas ar skrid ofisiel.

Menegomp c'hoaz : Roparz *Guibé*, eskob Treger, kannadour a-berz Loeiz XII (1500), ha Denez *Briçonnet*, eskob Sant-Malo, kannadour ivez ha diwezatoc'h kardinal (1518). Tri c'hantved war-lerc'h, daou Valouad all, *Chateaubriand* (1818) hag ar c'hont *a Ferronays* (1819) a dlee kaout an hevelep karg.

Ne gaver ket alies anioù hor c'henvroiz e-touez re an arzourien hag ar ouizieien ; o c'havout a reer niverus avat e-touez an ofiserien hag ar baotred deredet a-youl-kaer war c'halv ar Pab da zifenn gwirioù an Iliz Santel. Ar jeneral markis a Bimodan, kouezet e Castelfidardo e 1860, en deus e vonumant e Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued, hag anioù breizat rik, eus an noblañs hag eus ar bobl, a c'heller lenn ouz an obelisk a lakaas sevel Pi IX e bered Rom e koun eus e zouaved kalonek !

En deiz-hizio, e-touez ar Vretoned a zo e Kêr-benn an Iliz, ez eus dreist-holl Superiorez, kuzulierien Iliz, prokulerien, postulerien, kelennerien pe studierien e skolioù-meur ar Pab ha leanezed a bep seurt.

Pell diouz o bro vihan, ar Vretoned a vez laouen oc'h adkavout amañ roudou o c'henvroiz, gant skouer o labourioù kaer ha c'houez vat o vertuzioù.

Brug Breiz (F. A.).
(Rom 4-1955.)



E pelec'h, dre ar bed en em lazer an nebeuta

Eur vro a zo hag a garomp kalz, ni Bretoned, eur vro getiek evel hor bro deomp-ni : Iwerzon (Irlande). Hogen, setu ar pezh a zesk deomp ar gelaouen amerikan « *Scientific Amerikan* », niverenn Du 1954.

Er bed-holl bep bloaz 310.000 den a ro d'ezo o-unan taol ar maro. Er Stadoù-Unanet (Etats-Unis) 20.000 a varv evelse.

Met e Bro-Iwerzon, en eur bloavezh, evit 100.000 dén n'ez eus nemet tri emlaz (suicide).

Meur a abeg a boulz an dén da lemel e vuhez digantañ e-unan : follentez, kleñved dibareüs (incurable), poanioù bras, c'hoant da adkavout unan karet maro.

Met kalz emlazez a zo, dreist-holl, en tiegezioù dizunanet.

An den a laka en e benn ne c'hall ket beva hep ar vaouez en deus hen dilezet. Hel laza a ra hag en em laz e-unan war he lerc'h. Pe ma ne c'hall ket he zepa, ez eo ken fall-galonet ma 'c'h en em laz e-unan.

E bro-Iwerzon, an tiegez a jom yac'h, divrall. Abalamour da se dreist-holl ez eus ken nebeut a dud oc'h en em laza.

Lennet diwar « *Ami du Clergé* », 3 C'hwevrer 1955.

Y. T.

Broiou ar Sav-Heol-Tosta

Abaoe eur pennad, ha dreist-holl er sizunvezioù diweza, e vez ano alies eus broiou ar Sav-Heol-Tosta. An Turkia hag an Irak o deus sinet eun emgleo evit en em zikour. An Ejipt a ziskouez n'eo ket kontant...

Pa zeller ouz ar gartenn e c'heller beza souezet o welout kement a vroioù er c'horn-douar-se.

An Turkia a zo anavezet gant an darn vuia ; an Ejipt ive. Met ar re-all ! Selu o anoioù : *Syria, Liban, Palestina, Transjordan, Arabia, Yemen, Aden, Hadramaout, Oman, Bahrein, Koweit, Oukouba Ouafra, Iran*. Lod anezo n'int merket war kartenn ebet kouls lavarout. N'omp ket zoken re sur eus o harzoù ! Taolomp evelato eun taol lagad war ar broioù-se an eil goude eben.

An Turkia a zo eur republik yaouank (1923), muzulman. Eur vro modern. An holl gizioù koz a zo bet taolet er stal a gostez gant Kemal Atatürk. Wardro 17 milion a dud. Labour-douar, frouez, koajou, nebeut a labouradegoù evit c'hoaz. Troet a-du gant ar C'huz-Heol gant aon rak ar Russi, stok outi. Kêr-benn : Ankara.

An Ejipt : eur republik ha n'he deus c'hoaz nemet eun nebeut bloavezioù. Ar roue Farouk a zo bet harluet, met abaoe ez eus bet meur a chenchamant e penn ar vro. Ar Zaozon, a yoa er vro pell 'zo, a zo bet ive taolet er-mêz, warlerc'h an trouz a zo bet savet diwar goust Kanalel Suez. Eun dezers, nemet trao-nienn an Nil a gaver enni ar pep brasa eus ar 16 milion a dud a zo er vro. Labour-douar, dreist-hoo : koton ha korz-sukr. Kêr-benn : Le Caire.

An Irak : abaoe 50 vloaz dindan galloud Bro-Saoz. Eur vro binvidik gant al labour-douar etre an Tigr hag an Euphrat, met dreist-holl gant ar petrol. 3 milion hanter a dud. Kêr-benn : Bagdad.

Ar Syria : alc'houez ar Sav-Heol-Tosta ! Abalamour da-se, moarvat, eo bet taolet ar Frañs kuit e 1941 ! Eun dezers, nemet war ribl ar « Méditerranée » hag an daou du d'an Euphrat. Labour-douar, frouez. 2 villion a dud, Arabed evit an darn vuia. Kêr-benn : Damas.

Al Liban : evel al lodenn eus ar Syria war ribl ar mor. Eur milion a dud, kals kristenien en o zouez. Kêr-benn : Beyrouth. Ar Frañs a zo gwelet mat el Liban.

Ar Palestina : an Douar-Zantel, rannet etre an Arabed hag ar Judevien (Bro Israël). Labour-douar, frouez. Tost da 2 vilion a dud, Arabed ha Judevien asamblez. — E pep hini eus an diou vro-mañ (Liban ha Palestina) e tegouez korzennoù o tegas ar petrol eus an Irak.

An Transjordan : dindan galloud Bro-Saoz. Eur rouantelez ; war dro, 350.000 den, holl Arabed. Eur vro baour. Kêr-benn : Amman.

Arabia : rouantelez abaoe 1932. Kouls lavarout eun dezers penn-da-benn ; wardro 6 pe 7 milion a dud, holl Arabed. Brasa pinvidigez : ar petrol. Kêr-benn : El Riad, e kreiz an dezers.

Ar Yemen : gouarnet gant eun « émir », dindan galloud Bro-Saoz. Eur vro binvidik : douar mat, dreist-holl evit ar c'hafe (Moka). Eur milion a dud, holl Arabed.

Bro Aden : da Vro-Saoz. Wardro 250.000 den, holl Arabed. Ar vro n'he deus ket an distera talvoudegez, nemet ar porz a gomand an treid etre ar Mor-Ruz hag ar mor-bras.

An Hadramaout : talvoudegez ebet, eun dezers ; wardro 400.000 den, holl Arabed ; dindan galloud Bro-Saoz evit diwall he c'homers dre vor ha klask petrol !

Bro Oman : eur vandenn zouar didalvez meurbet war ribl ar mor ; dindan galloud Bro-Saoz ive ; wardro 500.000 den (nebeutoc'h moarvat !). N'eus nemet porz Mascate hag a dalvesfe eun draig bennak !

Bahrein : eur vozad enezennou e dorn Bro-Saoz. 120.000 den, holl Arabed. Eun ehan anavezet evit an avionoù. Kaout a reer eno perlez ha petrol n'eus forz pegement !

Koweit : wardro 40.000 den, Arabed. Gouarnet gant eun « émir » en ano Bro-Saoz evel enezennou Bahrein ha leun a betrol evelto.

Broiou Oukouba hag Ouafra a zo bet krouet gant Bro-Saoz evit pellaat an Irak hag an Arabia diouz puñsoù petrol Koweit. N'o deus talvoudegez ebet nemet dre ar petrol a gaver dindan an douar.

An Iran (gwechall : ar Perse) : eur rouantelez. 15 milion a dud, met n'int ket Arabed daoust ma 'z int muzulmaned. Eun nebeut labour-douar, koajou, met dreist-holl petrol. Trouz a zo bet, n'eus ket pell, etre an Iran ha Bro-Saoz diwar goust an « aour-du ».

En diverra : nemet an Turkia hag an Ejipt, holl broiou ar Sav-Heol-Tosta a zo paour evit ar pezh a zell ouz al labour-douar ha niver an dud. Met ar c'horn-douar-mañ a zo pinvidik mor gant ar petrol...

Y. G.



Na glaskit ket afer ouz kilhog an ti all !

Kement-mañ a zo bet c'hoarvezet, n'eus ket gwall bell 'zo, e ker-benn an Ejipt. An holl a oar ez eo plat an toennou war tiez a vro-se.

Eun itron goz eta a save war leur-doenn he zi eur vandennad yér, eur pabor a gilhog da vestr warno. Met da betra e talvez eur c'hilhog ma n'eo ket da gana ! Kilhog an itron goz a gane, deiz ha noz, bep tro ma veze soñjet gantañ. Siwaz, bez e oa o chom, en eun ti all e-kichen, eun tenner-dent hag a veze skañv e gousk, hegaset gant e zent e-unan pe betra, n'ouzon ket. Ar pezh a zo, avât, eo e kavas an tenner-dent e oa eun torr-penn klevet cholori pa vez ar paour kaez o klask ober eur c'houk sioul didrabas. Mont a reas da zisplega e boan d'ar polis, met ar polis ne reas van ebet ouz e glemmou. N'euze 'ta n'en doa da gonta war zen ebet, nemet warnan e-unan. Ha setu ma lakaas en e benn terri d'ar c'hilhog evit mat e c'hoant kana.

Tapa a reas kontell ar gegin, ha yao war vegou e dreid, evel eun torfetour, etrezek ti mestrez ar c'hilhog. Hag heñ en ti. Hopala ! eun den dirazañ : mab an hini goz. « D'am zikour ! al laer du-mañ ! » eme hemañ spontet.

Hag an itron goz da zeredek buhana ma c'helle, war he seuliou eun niz dezi.

An tenner-dent, tapet divalo, hag o soñjal er vez hag en dizenor a gouezfe warnañ — rak piou e gredfe pa lavarfe ar wirionez ? — a gollas e benn. Rei a reas bep a daol kontell da vab an ti, d'an itron goz ha d'he niz. Hag e lammas prim er maez.

E gwirionez ne voe ket gwall c'hloazet an tri zen paour. Evit paotr ar gontell, avât, n'ouzer ket penaos en em zifretas etre daouarn ar varnerien.

Ar c'hilhog koulskoude, daoust d'ezañ da veza bet penn-kaoz d'an drubuilh, a gendalo'has da gana ken seder hag arak.

Melar.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG

Bodadenn e Landi.

D'ar 24 a viz Ebrel hon eus bet hon trede bodadenn e Landi e sell ouz ar Bleun-Brug bras, Mont a ra al labour endro mat kenañ. Ma vez brao an amzer, e vo kaer dispar pep tra. 50.000 trakt skeudennet hon eus moulet. Hor mignoned a garfe o skigna en dro d'ezo pe o lakaat en o liziri a zo pedet da skriva d'eomp. Setu aze eur skoazell da renta d'eomp. Pep Bleun-Bruger a dlefe en eun doare pe zoare, rei skoazell d'eomp. Erru eo ivez er-maez ar skritellou. Pet hoc'h eus c'hoant a ve kaset d'eoc'h ? Bez 'e rankint beza laketa, n'eo ket war ar mogerioù, met ouz gwerennou bras an tiez komerzh. Evit-se e vezint an hanter bihanoc'h er bloaz-mañ. Amañ adarre, deuit war hor sikour. Ha ma vez kaset d'eoc'h eur skritell bennak, n'o lezit ket da loueda, en ho pureo, en an' Doue. Kemerit ar boan d'o c'has d'an tiez ha d'o spega hoc'h unan ouz ar werenn.

Bodadenn Kendalc'h.

D'ar c'henta a viz Mae hon eus kemeret perzh e bodadenn kendalc'h e Kemper. Al labour pouezusa a zo bet graet gant ar 100 a re yaouank a oa eno, eo renka devez bras ar brezoneg, e Breiz a bez. Eur vodadenn a dalvoudegez eo bet hounnez hag a ra enor bras da yaouankizou ar c'helc'hiou. Diskouezet o deus ez eus en o fenn estreget c'hoant dañsal ha kana.

En devez araok e oa bet eur vodadenn gant bureo an F.C.B. diwarbenn ar memes tra.

Digor eo Roz-Bleuniou.

Gwelet a rit ne chomomp ket da gousket. Mont a reomp eus eur vodadenn d'eun all.

D'ar sadorn goude koan, komite ar Bleun-Brug hag eun nebeut mignoned a en em vode e Roz-Bleuniou evit eur studiadenn, dindan renadur an ao. Duigou eus ar « Progrès ». Diskouez a reas hemañ, splann, petra e dlefe beza labour eur c'helc'h breizek, gant ma vo bouet a zoare gant eun danvez o tont d'ezañ eus eur greizenn uheloc'h. Pouezus evel ma 'z eo ar studiadenn-mañ, emañ en hor soñj he moula en eun niverenn a zeu. Setu perak ne gomzimp ket muoc'h anezi hirio.

En deiz warlerc'h, ar sul, e voe eun oferenn e brezoneg penn da benn, lavaret ha prezeget gant an ao. chaloni Falc'hun eus Skol-Veur Roazon, e chapel Itron Varia Gastellin.

Goude ec'h adkrogas ar bodadegou. Kudennou e sell eus ar Bleun-Brug a voe studiet piz. Ar seiz devez studi bet graet e-doug ar bloaz a voe kavet mat, hag an holl a c'houlennas kendalc'h ganto er bloaz a zeu, goude en em glevet mat gant « Kendalc'h » evit ma teuo hon labour d'en em glevet evit mad an holl. Muoc'h a zeveziou studi a vo klasket ober, gant nebeutoc'h a dud e pep hini. Klasket e vo ive sevel evit ar pennou, deveziou speredel muoc'h troet war draou an ene.

Kendalc'hiet e vo c'hoaz gant ar prezegennou er skolaioù hag an troiadennou er skolioù bihan. Tost da 100 skol a zo bet prezeget enno er bloaz-mañ. Biskoaz e istor Breiz n'eus bet graet eul labour ken pouezus war dachenn ar skolioù. Mignoned, skoazellit ac'hanomp, rak pep troiad er skolioù a goust d'eomp kalzig arc'hant.

Da fin an devez-studi-mañ e voe « inoguret » Ti ar Bleun-Brug, dirak eun toullad mat a vignoned deuet eus pep korn. Pebez levezon en em gavout eno bodet dindan sell an ao. Perrot, en eun ti hag a zigaso da soñj eus presbital Skrignag. Ac'hano, ar Bleun-Brug a fell d'ezan skedi war Vreiz a-bez. An ti-se a chomo digor noz deiz, evel ti sant Erwan, d'an holl re a zeuio da skei war e zor.

Goude, an ao. Falc'hun a spilhennas war bruched Visant Seite, lore an Akademi. Evel m'en deus lavaret en e respont d'an ao. Falc'hun ha d'an ao. Gab ar Moal, n'eo ket evitañ e-unan eo en deus digemeret al lore-se, met en enor d'ar re o deus bet labourer gantañ war dachenn ar yez : Herri Caouissin e « Feiz ha Breiz ar Vugale », ar Frered Uguen, Riou ha Stephan war dachenn al levrioù-skol.

Pep hini a zalc'ho eus an devez bras ha kaer-mañ ar gwella mignoniaj a vo evidomp eun ere muoc'h a garantez. Beva er garantez, unanet bepred, zoken gant

soñjou disheñvel, setu ar pezh a rolo frouez d'hon labourioù hag a zacho warnomp gliz santel an Nefiv.

V. Seite, ha n'hell ket respont d'an holl liziri en deus bet, a lavar amañ bennoz Doue d'ar re holl o deus skrivet d'ezañ da ginnig goude hemennou.

Bleun-Brug Kallag.

D'ar 15 a viz Mae eo bet lidet Bleun-Brug eskopti Sant-Brieg, e Kallag.

Aotrou Person Kallag hag an ao. Le Jane, e gure, skoazellet en eun doare dispar gant o farrezioniz o doa pourchaset pep tra evit ma teufe ar gouel da vat.

An ao. Kadoudal, evel kustum, ne espernas nag e amzer nag e boan evit lakaat loc'h en holl. Na den, na netra, ne viras outañ da vont betek ar pal. An ao. Kalvez, a gasas endro ar c'hensrivadegou skol. An ao. Breton, person Tremargat a savas ar « Jeu scénique » gant skoazell an ao. Ar Sant kure Boulvriag.

An amzer ne oa ket gwall vras, siouaz ! Avel yén ha barradou glao. Se ne viras ket ouz ar gouel nag ouz an dud da zont niverus a-walc'h.

Araok an oferenn, e skol al leanezed ez eas en-dro ar c'hensrivadegou : lenn, kana, displega, konta, prezeg. Eun 250 bennak a vugale a dremenas e-doug ar beure, dirak eun dek jury bennak dindan renêrêz an aotrounez Kalvez ha Seite. Eun dudi e oa klevet ar vugale-mañ, kén paotred, kén march'ed o displega « an dañvad penn-gornig », « Kenavo Janedig d'he merc'hodenn », « Va mamm », « Klemmou ar Fil-hor », pe « Va c'hornad kenta ». Ken plijus all e oa klevet ar ganerien o kana « Son al laouenanig », « Son ar paotr skol », « Ar plac'h vihan », « Bannielou Lambaol » pe « Bleuniou o tremen ».

Ar prizioù kenta a yeas, evit ar merc'hed : **Lenn** : gant Jos. Quelled, Plouber ; Y. Laouenan, Rospez ; E. Briant, Duault. — **Displega** : J. Quelled, Plouber ; E. Even, Plouber ; E. Briant, Duault. **Kan** : Ch. Le Boule'h, Duault ; J. Merrien, Kallag ; A. Guillosou, Duault. — **Tresa** : E. Rostanlenn, Kallag ; F. Guyader, Kallag ; H. Le Roux, Brelevenez.

Evit ar baotred : **Lenn** : Le Roy, Plouezec ; A. Razavet, Buhulien ; R. Thepaut, Guengamp ; R. Gestin, Gwengamp. — **Displega** : M. Kerlevoe, Pempoull ; F. Budet, Gwengamp. — **Kan** : A. Janin, Plouezec ; L. Person, Pempoull ; Mordelet, Plésidy ; J. Bodergat, Plésidy. — **Tresa** : B. Goyet, Kallag ; Guérin, Pempoull ; M. Rouaud, Pempoull.

Tud vras : **Prezeg** : Eugeni Bideau, Buhulien. — **Kan** : An Du, ar Vouster ; Mari Kadoudal, Magoar.

Lazou-kana : 1. Rostren ; 2. Plounevez-Kintin.

Wardro 150 levr a zo bet lodennet etre ar c'hounideien.

An oferenn, lavaret da 10 h. 30 a voe eun nevezenti dra ma oa bet kanet enni an Aviel, an Abostol, hag ar c'hanou latin, e brezoneg. Ar brezegenn a voe graet gant an ao. An Du, person Plougernevel.

Goude merenn, eun ambrougadeg eus ar re gaera (eun 20 kele'h pe wardro) gant marc'hegeien er penn araok, a gasas an engroez betek park ar Sportou-el lec'h ma voe eun abadenn vras : koroll ha kan el lodenn genta, ha c'hoariva « An dour e istor Breiz » en eil lodenn, e brezoneg penn-da-benn. Bez' e c'heller meuli, ar re holl o deus kemeret kemend all a boan da sevel an abadenn gare-se. Meuleudi da verc'hed bihan Kallag a daolennas ar ster, da dud Tremargat ha d'o ferson, ha da gele'h Boulvriag, a c'hoarias Ker-Iz.

Ar brosesion gaer, a gemeras perzh enni holl barrezioù ar c'hanton, a skoas an holl. Bennoz ar Sakramant dirak porc'hed an iliz a voe eun dudi.

An abadenn goude koan eo, marteze, ar pezh a wella a zo bet e Bleun-Brug Kallag. Kanaouennou Laz-Kana Itron-Varia Wengamp renet gant an ao. **Poder** a blijas kalz-kalz. Ha petra da lavaret eus ar pezh-c'hoari « **Mil pok** » ! Fentusoc'h pezh-c'hoari, ha gwelloc'h c'hoarierien eget strollad Rostren, ne gavez e neblec'h. Meuleudi d'ezo hag ivez d'an ao. **Nouel**, aozer ar pezh-c'hoari-se. Heti a reomp kaout tro da embann e « Bleun-Brug », peziou-c'hoari evel « Mil pok ».

Ha bremañ, holl da Bleun-Brug Branderion, Morbihan, d'ar 26 a viz Even. Arabat ankounac'haat.

Devez ar Brezoneg.

D'an 19 a viz Mae edo devez ar brezoneg ganeomp, evel gant an holl re all. Kalz a vefe da skriva diwarbenn an deiz-mañ. Eur gavaden gaer ! Eun deiz bras e gwirionez ! Ha brasoc'h e vo c'hoaz.

Prézidant ha sekretourien hag all, kestet hon eus war ar ru. Astennet hon eus hon dorn. « Evit ar brezoneg » mar plij ! hon eus hopet a gleiz hag a zehou.

Ar gammed kenta; marteze, a zo bet diaes da ober ! met, a-benn an noz e oa evidomp eur blijadur !... « Da vloaz, emezomp-ni gant eun tamm skiant-prena, e raimp gwelloc'h c'hoaz ! »

Petra eo bet an devez dre Vreiz a-bez ? N'ouzomp ket c'hoaz. Amañ avât eo bet frouezus. Dek kwech muioc'h eget warlene ! ! Preparet mat e oa bet an dachenn : Prezegennou en ti-kêr gant Keravel ha V. Seite, eur c'homite laket war-sao gant an ao. Person hag an ao. Mer e penn. Skritellou a pep ti. E Kemper edo ar Prefed hag an ao. 'n Eskob e penn ! ! !... Biskoaz kemend all ! ! !... Eun dra bennak a zo kemmet e Breiz.

Goulennet hor boa embann ar gest e pep « Semaine Religieuse ». Graet eo bet. An ao. Kardinal Roques, a deurvezas zoken, kas d'eomp eur gêr personel skrivet eus e zorn e-unan. Embannet eo bet ar gest er gador zarmoun hag en tiez-kêr.

Goude kement-se, ar Breizad hag a lavar karout ar brezoneg ha n'en deus ket kestet a diefe ruzia gant ar vez.

Da vloaz e vo eun enor mont da gestal. Ha ne vo ket eur gwir Vreizad ha ne astenno ket e zorn.

Ha c'houi, lenner ker, ha kestet hoo'h eus ? Ma n'oc'h eus ket, evit ho pinijenn, kasit 500 lur da F.C.B. : Louis Ropars, Creac'h-al-Lann, Kerfeunteun (Fin.). C.C.P. 159.763 Nantes.

Koazeadennoù.

E skolaj Sant Erwan e Kemper : « Arz Breiz », gant Jos. an Doare. — « Lennegez Vreiz », gant an ao. Batany. — « Kanaouennou Breiz », gant an ao. Derian. — « Istor Breiz », gant an ao. Gálvary.

Ei Likès, Kemper : « Arz Breiz », gant Jos. an Doare. — « Kanaouennou Breiz », gant an ao. Derian.

E Sant Loeiz Kastellin : « Lennegez Vreiz », gant an ao. Batany. — « Kanaouennou Breiz », gant an ao. Derian.

E Ti-Kêr Kastellin : « Kelennadurez ar brezoneg er skolioù kristen », gant V. Seite.

E kele'h keltiek Kleder : Ar brezoneg : e istor, e dalvoudegez, e stad, e gelenadurez, gant V. Seite.

« Bleun-Brug » a zo re vihan.

Pedi a reomp hor c'henlabourien d'hon digarezi ma n'hellomp ket atao embann o skridoù ken buan ha ma karfemp. Pennadou Kerlann hag a dliemp kregi ganto er miz-mañ, ne grogint nemet er miz a zeu. Pennadou mat all a zo c'hoaz o c'hortoz tro, digant Mela, L. Lok, R. Kervene... hag eur bern barzonegou ha kanaouennou. Pasianted eta !



HOR MADOBÉROURIEN

Evit Roz-Bleuniou, Ti ar Bleun-Brug (Kendalc'h).

Itron Gab ar Moal : 8 ridoch evit ar prenester. — Dimezell Fr. Thevenet : 6 tas ha 6 pladig. — Ao. Laurent, Paris : 1.000 lur. — Ao. Cavellat, Naoned : 1.200. — Ao. hag Itr. Breton, Rosko : 1.000. — D^r Dujardin, Lokournan : 1.000. — Dlle Cécile Pouliquen, Landerne : 1.000. — Ao. Bleunven, Lokournan : 500. — Ao. Legrand (beleg), Bouguenals : 1.000. — D^r Savina, Pont-e-Kroaz : 1.000.

Ar pezh a ra en holl : listenn genta : 78.300 + eil listenn : 7.700 = 86.000 lur. — Digor e chom roll ar broferien. Kasit ho tonezoù da : V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin. 544.22 Nantes.

Dispignou bet gant Roz-Bleuniou : Penturi ha papera ha traouigoù all : 74.308 lur — Electrisian : 5.600 lur — Lakât an dour en ti : 46.600. — Installasionou e diabarz an ti : 39.531 lur — Prenachou a bep seurt : 13.243 lur — Telefon : 12.000 lur. — Ar pezh a ra en holl : 191282 lur a zispignou.

SKODENNOU IZILI 1955

Ao. Caradeuc : 500 lur. — Ao. Lemerrier d'Erm : 1.200. — Dlle Cazin d'Houingthun, Gionel : 1.000. — Koronel Malleray : 1.000. — Ao. Bescond (Doue r'e bardono) : 1.000. — Ao. Morvan, Landreger : 500. — Ao. Guillermou : 500. — Ao. Y. Graff, Scaer : 200. — Ao. Audic, Plouay : 500. — Ao. E. ar Moal, Koadout : 500. — Ao. Jézéquel, Brest : 500. — Ao. Gassot, Tréboul : 500. — Baron Pichon Longueville, Paris : 500. — Leanez Anna Ronan, Plogon : 500. — Ao. Leseine, Paris : 500. — Tad Cadiou : 500. — D^r hag Itron Philippe, Tréboul : 1.000. — Ao. Bleunven, Lokournan : 1.500. — Baron Mauny : 500. — Job Seité, Guisseny : 500. — Dlle Chevillotte, Brélès : 500. — Ao. Merwen Runpaot, Cracouville : 500. — Ao. Marc ar Berr : 500. — Ao. Croguennec, person Plougar : 500. — Ao. de Pouliquet, Plougerne : 1.500. — Ao. de Kerangat, Daoulas : 500. — D^r Stephan, Rosko : 1.000. — D^r Ezel, Douarnenez : 1.000. — Chaloni Rannou, person Douarnenez : 500. — Ao. de Lang'ais, Roazon : 500. — D^r Regnault, Roazon : 1.000. — Ao. Le Minor, Naoned : 500. — Ao. Even, Landreger : 500. — Ao. Laurent, Paris : 1.000. — Dlle Martin, Brest : 500. — Ao. hag Itr. Seité, Kleder : 1.000. — Dlle Seite, Plabennec : 500. — Itron de Bellaing hag he merc'h Hoelle : 1.000. — D^r hag an Itron Savina, Pont-e-Kroaz : 1.000. — Ao. hag Itr. Audic, Ploare : 1.000. — Ac. de Saint-Sauveur, Roazon : 200. — Ar pezh a ra en holl : 28.630 lur.

Pedi a reomp hon izili da bae d'eomp o skodenn 1955. Kas an arc'hant da : V. Seite, B'leun-Brug, Châteaulin (Fin.). C.C.P. 544.22 Nantes. — Ezel : 500 lur. — Ezel madoberour : 1.000 lur.



K E L E I E R

« Mouez ar Vro ».

Loeiz Roparz, gant kelc'hiou Karaez, Rostren, Spezed, Kemper ha Koatserho a zo bet en Haor-Nevez o rei da glevet d'ar Vretoned a zo du-hont, mouez ar Vro. Kan ha diskan, koroll ha kanaouennou a zo bet gantañ. Levenez o deus hadet e kalon hor c'henvroiz divroet ha graet enor da Vreiz. Bretoned an Haor-Nevez a vez bep bloaz er Bleun-Brug dindan renadur o Omounier, an Tad Guervenou. Dont a raint adarre da Landivizio.

Levriou nevez.

Hor c'henvreour Korantin Riou a gas d'eomp : « 24 pennad lenn gwenedek », evit ar skolioù, dreist-holl evit skolidi ar B.E.P.C. Eul labour eus an dibab, roneoskrivet kempenn. Meuleudi d'it, Korantin evit al labour vat a rez kén war dachenn ar skol, ar skol dre lizer hag al lennegez vreizek.

Evit kaout ar 24 pennad lenn, skriva da Frère Riou, école N.-D. de la Clarté, Baud (Morbihan).

Resevet hon eus c'hoaz : « Skol ar Brezoneg », digant ar Falz. Eul labour eo hag a virit kemend all a veuleudi. Ra vo kalz a vistri oc'h ober implij eus kentelioù « Skol ar Brezoneg ».

An D^r Tricoire, hor c'henlabourer, a zo krog da embann e levr deski brezoneg « Lennom, komzom, skrivom brezoneg » dre strobadoù (6 strobadoù a vo, unan bep tri miz). 120 lur ar strobadoù. Skriva da : D^r Tricoire, rue du Couëre, Châteaubriant (Loire-Inférieure).

Skol-hañv.

Ar skol-hañv a vo dalc'het er bloaz e Porzsall azalek an 8 a viz Eost. Skriva da : Mme de Bellaing, Le Valy, Guingamp.

Bezit holl e Bleun-Brug Landivizio

d'an 29-30-31 a viz Gouere

ROLL AR GOUELIOU, DRE VRAS

GWENER 29 : Azalek 14 h. 30 : Prezegennoù diwar-benn amzer dremenet ar B.B. hag an Ao. Perrot gant an Dimezell **Mari a Gervenguy**, an D^r **Dujardin**, an D^r **Cornic**, **Herri Caouissin**...

Da 21 h. : Sinema diwarbenn Breiz.

SADORN 30 : 9 h. 30 : Kendalc'h prezegennoù ar gwener. Ar B.B. e-doug ar bloaz diweza, gant an Ao. **Gab ar Moal**, ha **V. Seité**. Ar B.B. en amzer da zont, gant an Ao. **Favé**...

14 h. 30 : « Kerjean et la Renaissance Artistique Bretonne », gant **Jos an Doare**.

Da 21 h. : **Noz a gan Keryann**, e maner Keryann-Sant-Nouga.
Prosesion ar goulou.
Oferenn hanter-noz.

SUL 31 : **Azalek 8 h. 30 : Kenstrivadegou** ar Bleun-Brug.

10 h. 30 : Dirak an Ao. **Kardinal Roques**, Eskibien hag Abaded Breiz : **Oferenn-Bred ar Bleun-Brug**.

14 h. 30 : Tro-Breiz ar Bleun-Brug (jeu scénique). 1.000 c'hoarier, koroller, kaner, eus Breiz a-bez,
Prosesion vras ar Bleun-Brug.
Bennoz ar Sakramant.

21 h. : **C'hoariva an Aotrou Perrot :**
Roue ar bed a-bez — E-tal ar Poull —
Ar Blogorn — Kanaouennoù, Rimadellou.



Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — G.P.P.P. N° 21697

HARDIZ ! PAOTRED



1.

Breiziz, ha klevout a rit-hu ?
Klevit diwar doull ho tor,
Korn-boud an emzao a bep tu,
O vouboual 'vel ar mor.
Pa 'mañ ho Pro, ouz ho kervel,
Arabat chom moredet.
Trubard biken ! Kentoc'h mervel !
Hardiz d'ezi 'ta paotred !

2.

Gwechall edo 'r c'hiz da deurel
Goap ha dispriz war hor yez ;
Hag ouz brezoneg o c'havel
Pennou diboeil o doa mez !...
Ar c'hiz-se 'zo aet da sutal,
Rak hor yez-ni Bretoned,
A zo ken kaer hag ar re all.
Hardiz d'ezi 'ta paotred !

3.

Bugale Breiz, klevit bremañ,
Klevit ar vombard laouen,
Hag ar biniou oc'h eilañ ;
Digor eo an abadenn !
Didostait bugale Breiz
D'ar Jabadao a-gevret !
Ha foei da gorollou Pariz !
Hardiz d'ezi 'ta paotred !

Evrnig-Penn-ar-C'hoad.

Bezit e Bleun-Brug Branderion (Morbihan)
d'ar 26 a viz Mezeven.



An Ao. chalon Falc'hun, kelenner e Skol-Veur Roazon,
o spilhenna lore an Akademi, war bruched Visant Seite,
d'an 8 a viz Mae e Roz-Bleuniou, Kastellin.

Petra zo a nevez, hirio, e Kastellin ?
Petra zo a nevez ? Petra ? livirit d'in.
Ma' zeus kement a dud, bodet e Roz-bleuniou
Eur goantenn a diig war eur bern deleziou ?
Paotred ha paotrezed, frered ha beleien
A zo e penn ar roz ' vel eun neiziad merien.
'Vel enn neiziad merien gant c'houez ar mël hentchet.
Eus a bep korn ar vro Breiziz zo diredet.
Breiziz ' zo diredet da glask magadurez.
Dousoe'h hini n'eus ket ha mël ar garantez.
Karantez Feiz ha Breiz ; n'o dispartiit ket,
Anez, Bleun Brugerien, ne vezo Breiz ebet.
Evit Tad ar Bleun-Brug, na gwella testeni !
Eur bedenn a garantez eo bet hoc'h hini.
E baradoz Doue e c'hell beza kontant ;
E Vleun Brug zo sturiet gant hor mignon Visant.
Met petra welan-me staget ouz e vruched ?
Daoust e vije bremañ, ar frered tud desket ?
Gourc'hemennou ! Visant, c'houi a zo deket.
Bezomp laouen ! Bleun-Brug, dreizoc'h ' zo enoret.

L. LOK.